



# HISTOR ADMIRABL

EUS A VUEZ

## SANTEZ HELENA

Var ton : YAN GUERIN.

C. G. R. M.



Brema e fell din discleria  
Ar vuez santez Helena :  
Bezit attentif d'he c'hlevet,  
Ho calon sùr a vo touchet.

Clèvet a refet e buez.  
Carguel eus a òristidignez,  
Hac ar martir e deves bet,  
Hac a zo ganti c'hoarvezet.

Me lavaro d'ec'h pen da-ben  
E voa hi caëra semeulen  
A guement a vije caret,  
Gant ar bed oll voa enoret.

Beza voa 'vrassa qualite,  
Pa voa hi merc'h da eur roue :  
Rac merc'h voa d'ar rone Anton,  
E Constantinopl voa e dron.

Pa voa Pap e Rom sant Clement,  
Ennes a voa eus e c'herent,  
E voe bars er bed-mâ ganet  
Er blaves pevar e haut ha dec ,

Goude an Incarnation  
A Jesus, hon rone guirion,  
Er guer eus a Constantinopl,  
Hac estimet bras gant ar bobl.

Pa voe en oad a bemzec vloas,  
He mam diganti a varvas,  
Ma fallas d'he zad e c'havet  
Evit ma vije e bried.

Mont a eure da gaout ar Pab,  
Hac en esper caout e c'hrat,  
Evit caout e gonsautamant  
Da zimezi d'he verc'h yaouanq.

Ar Pab neuze pa er c'hilêvas,  
A respont gant eur horror bras :  
Pelec'h m'ar c'hristen var ar bed  
A guemerse e verc'h da bried ?

Gant an ilis eo difennet,  
Ha gant Doue eo ordrenet,  
Na vezo james eureujet  
Eun tad d'e verc'h james nepret.

F  
96 000-773 B/8

E ve dimezet eur verc'h d'e zad,  
Ennez zo eur c'hriñ exécrapl;  
Eur c'hriñ a enep ar lezen  
Siouaz ! etouez ar gristenien.

P'e devoe clevét Helena  
Ec'h arruje sùr quemant-mâ,  
Var ar môr en em ambarquas,  
Hac ep Flandrez en em rentas.

Eno pa voe hi arruet,  
En eun eclus en em rentet,  
Pa voe tost da eun abati,  
E commançs son ar c'hlec'hi.

Neuze an oll leanezet  
A voe querquent bras estonet  
O clevet ar c'hleyer o son,  
Hac int mont oll en oréson.

Hac int mont da sellet neuze  
Piou a voa êru er c'hontre,  
Mar remerqjont eur femeulen  
A zeuê d'ho c'haout pen-da-ben.

Mont a rejont en procession,  
Gant respet ha devotion,  
Evit monet d'e rancontri,  
Gant eur joa vras d'e saludî.

Ha pa velas hi aneze,  
E voe estonet bras ive,  
Hac oc'h o guelet a vanden  
O tout d'e rancontr evellen.

Neuze resevjont anezi,  
Ha conduet d'an abati;  
Rac guelet a rent oll certen,  
E care an Autrou souveren.

Mes na chommas qet pell gante,  
E chenchas timal a gontre  
Drac ar roue Catebron,  
Eun den cruel ha dirézon.

Mont a eure var bord ar môr  
Evit sovetei e enor,  
Hac e pedas merdaidi  
Mar plich ganeoc'h va ambarqi.

Eun dra derrapl a erruas  
Pa voant e creiz ar môr glas,  
Rac an dud oll a voa lazet  
Gant ar c'horserrien arraget.

Exceptet gant Helena,  
E voa eur femeulen ar gaëra;  
O sonjal cavet e guerc'hdet,  
E voa hi ganto reservet.

En oréson en em laqas,  
Da Jesus en em recomandas:  
M'ho ped, va Jesus, va roue,  
Conservet va virginite.

Pa voa achuet e feden  
D'hor Zalver Jesus ev'hen,  
Eun tan eus an ee a g'oesas,  
Al lestr hac an dud a'ouqas.

Hi voe preservet gous'oude  
Ganteurplanquen dre c'hrac Doue,  
Ec'h arruas er rivier Sign,  
E quichennic bord eur jardîn.

Ar rivier 'ye bete Londrez,  
Hac eno e voa eur verjez.  
Hac eur feutenn gaër a gavas,  
En e c'hichen e tisquizas.

Ar roue Herri e guelas,  
Bars en eun dristidiguez vras,  
Azeet etal ar feunteun,  
Ha ne voa den en e c'hichen.

Tostat a rās neuze outi,  
Hac e c'houlennas diganti :  
Livirit din presentamant  
A belec'h oc'h merc'hiq yaouanq.

Me zo eus a Constantinopl,  
A guereant pinvidic ha nobl,  
Hac a zo amañ achappet  
A dre daouarn ar barbaret.

Ah! va c'halon a fazin-din.  
Rac naon e meus, ne allan mui ;  
Pell bras zo n'emeus, débret tam  
Ha va c'halon em e breiz a rann.

Ar roue Herri p'e c'hévas,  
D'e aumonier a gommandas  
Monet pront da guere'hat dezi  
Peadra vit e zbulaji.

Neuze en e bassas gantà  
Ebars en e da loja,  
Hac o tout d'e recommandi  
Evel unan a dud an ty.

Goude-se e voant demezet,  
Souden e voe grét an euret,  
Hac ar fest a badas gante  
Betec an nombr a ugent de.

Daou vlaves antier ez int bet  
En o fljadur assuret,  
Qen en em gavas douguerez,  
Neuze e devoe goal vuez.

Digant e mam-gær, ar Zantez,  
E devoa calz a baourantez ;  
Herves ma rapport an histoar,  
E devoa calz deus a c'hlaç'har.

Ar roue Herri a yas timat  
Da gaout hon tad santel ar Pab,  
Evel m'en d'oa recommandet,  
D'ar goubad ouz ar Sariaziuet.

Lezel a eure en secret  
Tri verq er guer deus e gachet :  
Bei ras unan da Helena,  
Eun all da Vari Cloestra.

An drede neuze a roas  
D'ar c'hont a voa e vignon bras,  
Da bini a recommandas  
E bried gant affection vras.

Glac'har vras a voe er pales,  
O lavaret adieu assambles,  
Hac epad eiz vloa varnugent  
N'en em volint sur e nep hent,

Helena e devoa ganet  
Daou vnguel a voe eær meurbet ;  
He mam-gær a roas da gredi  
Penos e devoa bed daou guy.

Ar roue Herri pa glevas,  
A voe certen estonet bras,  
O clevet e devoa ganet  
Daou guy evelse e briet.

Neuze a voa c'hi condaonet  
Da gaout e breç'h deo troc'het,  
Hac amaret e bugale  
Unan dezi a bep coste.

Ambarquet, voe voar ar môr bras,  
Ebars e Breiz e tisquennas.  
Al lestr en devoa e digasset  
Da Londrez a zo retournet.

Cri vije 'r galon na voe-lje,  
Oc'h e guelef nep a vije :  
O rei da zena d'e bugale.  
Hac hi prest da vervel digante.

Da gousquet pa en em laqas,  
Daou leon deus ar c'hoat e teuas  
Hac a gassas an daou vuguel ;  
Qement-mâ certen voa cruel !

Un Ermit a voa neuze 'r c'hoat,  
Ha dious ar c'fri e zeuas timat ;  
Hac a gavas an daou vuguel,  
Etre griffou daou leon cruel.

Unan ané Bric a hanvas,  
Eguile Martin a c'halvas ;  
O daou e voant gantan muguel  
Epad c'hoesec vloas assuret.

Ebars epad an amzer-mâ  
E voe e Naonet Helena,  
Hac eun hostises a gavas,  
Truez outi a gemeras.

Chom a eure da zervic'h,  
Ebars an ty voa 'n disterra ;  
Dispriset voa gant pepini,  
Laqet voa da d'orcha listri.

Ober a re gant dilijanç  
Hep na rebel na repugnanç,  
Quement a ordrener dezi,  
Eno re oll hep contraignî.

Guelit amâ g'eg eur roue  
Carguet deimeus a baourante,  
Rentet qen humbl ha qen izel  
Dirag ar bed universel.

Sellit brema'n humilite,  
Honnez a blich bras da Lone,  
Rac an humbl a zo exaltet,  
Hac ar superb zo discaret.

Ar roue Herri a distro Rom,  
Ha gantan ar roue Anton,  
A erruas en e bales  
Ebars er gær eus a Londrez.

Allas ! eno pa erruas,  
Ar c'hout Gloucester a gavas,  
Ha goulen neuze digantâ  
Telec'h voa ent Helena.

Nao messenger voa digasset  
Dirac ar roue da lavaret  
O doa digasset pep a liser  
D'ar c'hout Gloucester, a dra sele

Mes eun all a zeuas goude,  
A lavaras ar viciaat,  
Penos a voa bet v'abisset  
Gant ar rouanez eoz assuret.

Ar rouanez eoz zo condaonet,  
Ha vezan eun beo losquet,  
Abalamour ma e devoa  
Laquet trec'h hi bree'h Helena.

Me lavaro deoc'h ar recit  
An daou vuguel hac an Ermit,  
Ha penos voa an disparti  
Ebars er c'hoat gant cals a gri.



An Ermit var bord ar rivier  
A yeas gant an daou vuguel.  
Aman, emezan, o qivis  
Ganen d'am zy ho tigassis.

An daou vuguel a respontas  
Wan Ermit onto ys gouzas :  
N'en dé qet c'honi la, Ermit mal,  
Eo a so a dra sur hou tad ?

An Ermit neuze a lavaras,  
Deze gant tristidiguez vras :  
Allas ! m'ho cavas aman lezet  
Etre bleizi ha leonet.

Ha gant truez m'ho tigassas  
Ho taou ganen d'am ermitach,  
Hac emeus ivez ho mignuel,  
Hoc'h eleyet hac iustruet.

An daou vuguel a lavare  
An eil d'eguite aneze :  
Pa n'en dé an Ermit hon tad,  
Deomp-ni brema da glasq hou mad.

An Ermit a voe trist meurbel,  
Pa o c'blevgs a lavaret  
E zajeat, allas ! da glasq o mad,  
Pa na voa qet en voe o zad.

Pa voant o tiscours eyelse,  
Erruout mer aidi eue,  
Brema ez eus c'hoë-ec vloa  
E leqezomp ana lleleus.

Gant angen vras digousolet  
De daou vuguel e doa collet,  
Ne devoa bree'h nemet neuu  
Da zicour daou vuguel bian.

Neuze e lavaras Martin :  
Brie, va breur, deomp bete 'r fin,  
Flec'h un plijo gant Done hor c'hoë :  
Ma cavinp hor mam eur vech choa :

Merdadidi, ni ho suppli,  
Plijet guenec'h tou ambarqui,  
Ma zomp en hano Done  
Da glasq hor bro hac hor c'kontre :

Ar merdadidi a respontas  
D'an daou vuguel pa o c'blevas :  
Deut en hon lestr hac ambarque,  
Ni ho laquei en donar assuret.

En Allemagn ec'h arrijont,  
Hac arr hant dezo a rejoat ;  
Ouspen a rejoat da seiza  
D'an-daou vuguel, gant eals a jont.

En Bayjer pa voant arru,  
E zeont ho daou a ru da ru,  
Ma o guelas ar romanes  
Ebars er ru eus e fates.

Ma gommendas d'e messenger  
Mont da quere'hot an daou vugue,  
Hac quen coër oant evel an de,  
Clorianda o admire.

Digasset oant neuze dieazi,  
Roet e voe dezo da zibri ;  
Neuze evel tud affamet  
Ne squizent o libri o baëd.

Re hir ve ma content antier  
Ar brezel voa er bro Bavier,  
Mes beza voant victorius  
An daou vuguel, dre c'hrac Iesu.

Martin a voa eun den vaillant,  
Hac ebars er gombat sanglant  
Laha reas cals a Sarrazin  
Ha calz eus an Turquianet.

An Itron Varia Boloigne  
O sicouras sur an deiz-se,  
Hag evit caout ar victoar  
Dre c'hraç Jesus var an douar.

Da Doue e teujont ac'hane,  
Eur gaer so en Tourene,  
Sant Martin a voa aumonier  
Da rei soulach d'ar beorien-ger.

O mam ivez a erruas  
En Tour gant eur baourante vras,  
Pa voa Martin o tistrihui  
An Aluzon da bep hini.

Goulen a eure diouti,  
Pa deuas da zellet outi :  
Pe a lec'h oc'h-hu dent amâ ?  
C'houi n'endoc'h qet eus ar vro-mâ.

Commanç a ras neuze e galon  
Da zonet d'e biqat qen don,  
Neuze e teuas sonch dezâ  
Ebars en e vam Helena.

Diaguent en devoa clêvet,  
Evel ma hon eus rapportet,  
E voe troc'het eur vrec'h dezi  
Ha en dont da sonjal enni.

Neuze en em anavejont ;  
Gant joa vras en em saludjont :  
Autrou Jesus, eme Helena,  
Va bugale gues a velan.

Ne zezirent qet qent mervel,  
Nemet guelet va daou vuguel ;  
Ma bugale, meulomp Jesus,  
Zo bet 'n omp audrel trugarezus.

Autrou Jesus, Roue an Trôn,  
Homâ zo consolation,  
Da eur vam e devoa collet,  
He daou vuguel e deus cavet.

Pebez joa ive evithi  
Goelet c'hoas ar roue Herri :  
Ar prins-se qen madelezes,  
Qen humbl ha qen carantezus.

O Doue emei, ma fried,  
Guel-bell e c'homp bet separet  
An eil siouaz ! dious egnile ;  
N'em goelfet mui pell en bue.

Ea c'houi, ma zâd, prins meurbet  
'Vel pa vijen a re 'n ho ty, cri,  
Oc'h eus bet occasionet  
D'ar poagno bras a meus zouffret.

Adieu dec'h oll a lavaran  
Galvet hon prim d'en em rentan  
Bremâ en pales ann envo  
Ea recompanz d'em oll poanio.

Adieu, ive, va bugale,  
Mout a ran breman en han'Doue,  
Ho pet ac'hanon sonj a memoar,  
Va bugale guer, var an douar.

M'em bezo sonch ac'hanoc'h ive  
Pa vin en rouantelez an ee,  
Evit ma veziup oll assambles  
Er Barados gant an zêles.

(Propriété.)



## CANTIC AR BURETE

*Voar eun ton nevez.*

Clevit oll, yaouanquis, avison excellent,  
Tenquet deus ar Scritur ar Zent, an dud savant,  
Vit dont da gonservi antier ar burete  
Hac ive ho brud vad e mesq tud ar c'hontre.

Eur paour gant he enor so muioe'h estimet  
Vit eopl ha pinvidic m'ar bent dishenoret,  
Rac p'an defe eua den oll vado ar bed ma,  
Birviquen an henor collet n'all prena.

Hognen mam an henor eo ar gnir burete,  
Vel mam an dishenor eo ar lubricite :  
Nep so chast e nevo istim oll dud ar bed,  
Hini Doue, ar zaent, an xelez biniguet.

Vertu ar chastete a nevez en avanç  
A dalec ar bed-ma ato he recompanç,  
Vel ma meus lavaret, mes he ini brassa  
Vo gloar ar barados hep biquen finissa.

Divoallomp hon sellou, dorajo ar galou,  
Hy ra antren ebars a bep sort sonjeson :  
Conduomp aueze gant eur volesti vras,  
Evit conserv bepret ar vertu hac ar c'hraç.

E toues ar vugale, vel e mesq an dud vras,  
Ar fe, heu hou amzer, so divalo sionas !  
A boan e zeo deze gouzout ho *Be ha Ba*  
Ma canont chansoniou demeus ar re lousa.

Disquomp oll, christenien, ar voyen da viret  
Ar burete a gorf hac ive a speret,  
Rac balamour ma zeo eur vertu ar gaera,  
An drouc-speret a glasq bepret he distruja.

Satan a zo, ouспен, fin a traytour meurhet ;  
Ea dea deoatq emedy gant he bechou stignet,  
Evel eur bleiz, nos de, ho re tec an devet :  
Divoallomp. me ho ped, rac beza devoret.

Imitomp ar Vere'hes, Suzanna ha sant Yan,  
En eur guir, an oll zent evit beza divlam ;  
Hañ hon Salver Jesus, sourecn ar bareie,  
Er gloar hon curuno, hed an eternite.

Ea taat, quemeromp squouer deus ar verzerien,  
A heuilias er bed-ma, oll, hent ar binijeu :  
Na neveys quet moyea da c'houit ar victoar,  
Da da veza, un de redompansel er gloar.

A hent all, re hir ve donet da rapporti  
Histoar an dud impur, ha re an dud impi.  
Balhasar dr' er maro a so bet prompt squët,  
Ha Sodom ha Gomorh gant tan an én devet.

Evit fin pelleomp deus an occasion ;  
Ra vo hon meleziour, Samson ha Salomon ;  
Ar fura, ar c'hrenva a so deut da gouëa :  
Ha nin a gont beza fermoc'h bars en hon zaa ?

Na neo quet necesser deomp e n'em separi  
Na demeus hou c'herent na demeus tud hon zy,  
Vit evel hermitel, maout bars er c'hoajou  
Da ober pinijen ar rest deus hon deion.

Er bed, gant grac Doue, ha gant bolante vad,  
Nia a cava moyea vit en em sauetaat :  
Yrhomp deus ar pec'het, heuilomp na aviel,  
Vel Jesus ; vit gantz maout d'ar gloar eternal !

Guere'hes Vari, Mam vad, sicour ar pec'herien,  
Divoallet ac'hanomp deus hon adversourien.  
Gret ma vezimp ato par, chast ha vertuüs,  
Da c'hortos, en eüvo, ganec'h meuli Jesus !